


Peden evit-Benniga Bag ar Pesketour



DISKAN

Ave, Ave, Ave Maria (Bis).

1

O Guerc'hez benniget,
En deiz hag en noz
Var ho martoloded
Taolit ho pennoz.

2

Bennoz d'ar vag dister,
Ma ne zai morse.
Da skei var ar reier
Na d'ober pense.

3

Bennoz d'ar pesketour,
Ma teui 'n he roued,
Kerkent taolet en dour,
Berniajou pesket.

4

Bennoz d'ar biziner,
Ma c'hello 'r Breizad
Kaout en e barkeier
Eost founnus ha mat.

5

Bennoz, Guerc'hez santel,
D'ho servicherien :
Kristenien Breiz-Izel
Zo deoc'h da viken !

6

Deoc'h int hag e vezint ;
Da zul, da bemdez
Gant kalon e pedint
Ho Mam ar Werc'hez.

A. C

Imprimatur:

Kemper, 23 a viz c'huevrer 1932.

A. COGNEAU,

v. g.